

bev.bzh
raktres rouedad sokial
ar vrezhonegerien



empenn, kev, ar c'hoazh, anezhañ, kev, ar c'hoazh

kev, ar c'hoazh, anezhañ, kev, ar c'hoazh

Bev.bzh : bod pe boued etre brezhonegerien

Skoaziad : 10 000 €

Ur rouedad sokial evit ar vrezhonegerien e vo Bev.bzh. Ar mennozh : ur benveg evite da vevañ en o yezh gant tud anaet gante e-raok pe get. E penn ar jeu emañ Florian Lannuzel ha David ar Rouz. Kontañ a ra David un tamm hiroc'h dimp diwar-benn Bev.bzh.

Petra en deus lakaet ac'hanoc'h da soñjal sevel ur seurt lec'hienn internet ?

Me 'a [= 'm eus] desket un nebeud yezhoù hag e ouian ervat e ranker pleustriñ evit gallet o implij gwell : dre skrid koulz ha dre gomz. Moaian zo gober e degouezhoù a bep sort, èl kentelioù-nnoz, stajoù ha razh. Pa zibaber gober ur yezh afektivel ag ar yezh desket, avat, ne spir ket ken an degouezhoù berrbad, div euriad bep sizhun pe ur sizhuniad bep hañv, aozet get ur gevredigezh bennak : afer zo a ober gete er vuhez pemdez. Ar soñj pennañ eo enta ma c'hello ar vrezhonegerion kannig traoù d'ober da vrezhonegerion arall, anavet pe pas en a-raok. Lec'hiennoù 'sort-se zo e galleg evit ar c'hêrioù brasañ. Ni 'a [hon eus] afer ag ur lec'hienn evit ar vrezhonegerion dre vras, kalavern ar lec'h m'emaint é chom. Goude em boa soñjet e lec'hiennoù arall hag a c'heller kavet bod pe boued dreze evit beajiñ hep dispign re. Setu un digarez arall d'en em gavet get brezhonegerion na oant ket anavet c'hoazh, e-sigur gober un dra bennak er vro pe pelloc'h, ha pa vehe evit ar labour pe an dudi. Ar lodenn-se ag ar raktres eo a oa bet divizet get ar Redadeg argantiñ.

Ar lodenn ziwezhañ ag ar raktres a zo he fal renabliñ barrezhoù ar vrezhonegerion hag ar lec'hioù a vicher ma c'heller kavet lod anezhe, ha neuze skoulmiñ darempredoù "a vicher" e brezhoneg ivez.

Penaos e fellfe deoc'h e tennfe splet an dud eus Bev.bzh ?

Evit bremañ, n'hellont ket c'hoazh gober kalz a dra er lec'hienn, estroc'h evit reskont d'ur c'houlennaoueg hag a zo pouezus-bras deomp. Kar din-me, ne servij da netra lakaat nerzh en ur raktres ma ne denn ket splet ar vrezhonegerion ag an disoc'h, just a-walc'h. Ar reskontoù d'ar c'houlennaoueg a ziskouez dre vras evit poent e vehe intereset an dud. Mes 41 reskont a chom dister c'hoazh evit diskouez e c'hello beviñ ar lec'hiad, dreist-holl ma faot deomp monet betek penn get sikour arganterion arall. Da gentañ, neuze, ni 'a [=hon eus] afer a c'hoût ma c'hellimp tolpiñ implijerion.

Pa vo savet ar lec'hienn hag ar servijoù raktreset enni, e c'hello ar vrezhonegerion tenniñ splet anezhi evit lakaat muioc'h a vrezhoneg en o buhez pemdez.

Petra 'vo kavet el lec'hienn ?

Get ar lodenn a vo savet da gentañ, "Bod pe boued", e vo moaian d'an dud da vonet d'ober bourrapl en ur festival bennak ha chom hep dilezel ar brezhoneg d'an eur m'o do divizet monet da gousket, pe d'an dijuniñ, kar kavet o do ti ur brezhonegour degemerus. Pe, e-lec'h monet da zebriñ en ur preti da-geñver un emvod labour pell ag ar gêr, e c'hello lod arall ranniñ merenn get brezhonegerion n'anavet ket e-raok. Er lodenn "Beviñ e brezhoneg", unan hag a ya da redek bep

Meurzh da 6e d'enderv, lakaomp, a c'hello lâret er lec'hienn evit monet taol-ha-taol get ur redour arall pe oc'hpenn. Unan arall en dehe c'hoant da vonet da welet ur film er sinema hag e c'hello kannig er lec'hienn an deiz hag an eur evit gallet komz ag ar film goude, e brezhoneg. Ur familh a c'hello lakaat eh aint d'an aod d'an dibenn-sizhun kentañ ha monet a rahe gete familhoù brezhoneg arall pe familhoù get bugale skoliataet e brezhoneg.

Er lodenn "Barrezhoù ha brezhoneg", e vehe moaian da gavet ur skoazellerez-mamm vrezhonek pe c'hoazh un ti-bank ma vehe moaian da zibab ur c'huzulier brezhonek...

Perak e c'hellfe se bezañ spletus evit ar brezhoneg ?

Kumuniezh ar vrezhonegerion zo strewet e pep lec'h e Breizh, ma n'eo ket pelloc'h c'hoazh. Anat deoc'h n'eo ket ken aes derc'hel ar yezh bev èl ma oa pa veve an dud er mem' pennhêr a rummad da rummad, liammet kreñv an eil re get ar re 'rall... Sellit : bout zo ur yoc'h brezhonegerion e Roazhon ha neoazh e oa bet dilezet ar c'hentelioù-nnoz get paot-mat a zeskidi a-gaoz ma ne gavent ket digarez erbet da gomz ar yezh e degouezhoù arall. Goût e-men emaint ha petra a raont, aze ema an dalc'h.

Soñj pennañ Bev.bzh eo implij an teknologiezhioù nevez evit sikour get ar vrezhonegerion en em dolpiñ en-dro "er vuhez wir", ha n'eo ket àr-dreñv o skrammoù hepken. Get ma tapint krog er c'hannig da gentañ (dre an enklask a gaver c'hoazh) hag er benveg, pa vo savet. Kar, hepte, ne vo ket netra kanniget er lec'hienn, ne zay ket mui an implijerion nevez da welet ha mervel a ray, èl ma oa c'hoarvezet da Waranhent.bzh. Ma taomp da benn a dolpiñ ar gumuniezh enlinenn e c'hello an dud kannig a bep sort traoù ha beviñ e brezhoneg en ur yoc'h degouezhoù ma oa galleg hepken betek-henn. Ha mar bez klevet muioc'h a vrezhoneg èl-se, e tay marse muioc'h a dud da zeskiñ ar yezh, marse e talc'ho ar re yaouank d'ober geti goude o amzer skol dre ma vo daet da vout oc'hpenn yezh ar skol, marse e tay da vout afektivel da vuic'h a dud hag e vo treuzkaset, neuze, er familhoù...

Brezhoneg er vuhez foran zo mat mes arru omp d'ur poent ma n'hellomp ket mui chom kontant get arouezioù, testennoù pe komzoù brav. N'eus ket afer ag ur lezenn evit daremprediñ muioc'h a vrezhonegerion : moaian zo da zibab gouestliñ muioc'h a amzer da vignoned vrezhonek pe klask en em gavet get brezhonegerion nevez. Ma c'hell an teknologiezhioù sikour d'ober, e vehe pec'hed chom hep gober netra. Deomp-ni d'ijiniñ ar benveg a faot ha da dapout krog e-barzh.

Respontoù dastumet gant M.L.

Evit gouzout hiroc'h : www.bev.bzh